

Abadenn Ar Redadeg

- 1. Deomp da bourmen (Mi min)**
- 2. Dre an tu fall (Sol min)**
- 3. Deomp atav (Ré min)**
- 4. Tud ar bed (Mim)**
- 5. Soubenn ar patatez (Mim)**
- 6. Pok ha pok (Mi min Kan ha diskan)**
- 7. Koumoul du (Mi min)**
- 8. Aiou (kan ha diskan)**
- 9. Jakez Patatez !**
- 10.Loened fall (Mi Maj) !**
- 11.Mobilet (La Maj) !**
- 12.Traoñv an teven (Do min)**
- 13.Kanomp ta (holl asamblez) !**

RIGORDENNIG «redadig »

1

Al lapin bihan hag ar c'hi
O tañsal round en dro d'an ti
Al lapin bihan hag ar c'hi
O tañsal round en dro d'an ti

Diskan

Fardigoudennig tralala
Vit ar redadeg rigordennig
Vit ar brezhoneg rigordo
Vit ar redadeg rigordennig
Vit ar brezhoneg rigordo

2

Al logodenn hag ar c'hazh
O tañsal round en Enez Vazh

3

Al louarnig hag ar yar
O tañsal round 'barzh an ti gar

4

Ar rekin glas hag ar vaot
O tañsal round war vord an aod

5

Ar sparfel rouz hag an dred
O tañsal round a-raok ar pred

6

Ar silienn hag ar c'hrank
O tañsal round e-barzh ar fank

Kanomp'ta

Kanomp'ta merc'hed rak kanañ 'ra vat
kanomp'ta paotred, kanomp brav
kanomp en hor yezh bev atav
un ton, un ton hag a ra vat loñla
un ton, un ton hag a ra vat

Ar yezh zo graet 'vit be'añ kanet loñla
ar yezh zo graet 'vit be'añ kanet
ar yezh zo graet 'vit be'añ kanet
'vit be'añ kanet ha diskanet loñla
'vit be'añ kanet ha diskanet

Dañsomp'ta merc'hed rak dañsal 'ra vat
Dañsomp'ta paotred, dañsomp brav
Dañsomp war sonerezh ar vro
un dañs, un dañs, un hanter-dro loñla
un dañs, un dañs, un hanter-dro

Karomp pep hini meur a yezh loñla
karomp pep hini meur a yezh
karomp pep hini meur a yezh
hag ar brezhoneg en o zouez loñla
hag ar brezhoneg en o zouez

Round ar «redadig »

1

**Al lapin bihan hag ar c'hi
O tañsal round en dro d'an ti**

Diskan

***Fardigoudennig tralala
Vit ar redadeg rigordennig
Vit ar brezhoneg rigordo***

2

**Al logodenn hag ar c'hazh
O tañsal round en Enez Vazh**

3

**Al louarnig hag ar yar
O tañsal round 'barzh an ti gar**

4

**Ar rekin glas hag ar vaot
O tañsal round war vord an aod**

5

**Ar sparfel rouz hag an dred
O tañsal round a-raok ar pred**

6

**Ar silienn hag ar c'hrank
O tañsal round e-barzh ar fank**

5 MADIK

1

Kavet meus 5 madig

E barzh va godellig

Kavet meus 5 madig

E barzh va godellig

Sunomp Sunomp un all

Rak ur madig yopopop

Sunomp sunomp un all

Rak ur madig n'eo ket fall

Sunomp Sunomp un all

Rak ur madig yopopop

Sunomp sunomp un all

Rak ur madig n'eo ket fall

2

Kavet meus 4 madig

E barzh va godellig

3

Kavet meus 3 madig

E barzh va godellig

4

Kavet meus 2 vadig

E barzh va godellig

5

Kavet meus 1 madig

E barzh va godellig

6

N'eus ket ken a vadig

E barzh va godellig